

## CANTIC SPIRITUEL

VAR JUJAMANT AN DEN ER VARN GENERAL,  
TROET A LATIN E RREZONEC.

Var ton *Separation an Ene eus ar C'horf.*

CLÉVIT, cōs ha yaouanq, qement so var ar bed,  
Un avertissement a c'henou ar Prophet,  
Pehini a lavar d'an oll antieramant :  
En em gōvertissit, arru eo ar Jujamant.

C'hoant a meus da gomz deoc'h demeus ar Jujamant  
Ma ro din asistanc Doue oll-buissant ,  
Ha disclêrya d'ar bobl madelez hor Zalver ,  
A bep eternite en andret ar pec'her.

Etre Jerusalem ha menez Olivet ,  
Eno emâ ar plac ma vezimp oll barnet ;  
Ur varn hac a vezo hep mar definitif ,  
Jesus-Christ a vezo hor Barner , hor pontif.

An eil Person an Drindet , oboissant d'e Dad ,  
A azeo an deiz-se e traouyen Josaphat :  
Bet en deus ar pouvoar eus a zorn an Drindet  
Da brononç ar setanç a enep ar pec'het.

Pa vezo asezet ar Barner rigourus  
Er gador imperial gant ur faç colerus ,  
E c'halvo ar bec'herien evit o funissa  
Demeus an disprisanc o deus bet evintâ.

Pell so oc'h eus clêvet comz eus a fin ar bed  
Hac eus a signou bras a dle beza guelet :

Qernez hac ar vocen , brezel a vezo guelet ,  
 Ha chanchamant en eol , el loar hac er stered.

Pa vezo assamblet er plac-se an Drindet ,  
 Ar Zent hac an Ælet , an oll Patriarchet ,  
 E vezo commandet d'an Æl incontinant  
 Qemeret un trompil da zon ar Jujamant.

Neuze souden un Æl , dre ordrenanç Doue ,  
 A rai commandamant expres da bep ene  
 Da guemeret o c'horfo , evit dont assambles  
 Da glêvet un arret hep apelli james.

Pa glêvo Lucifer eus a c'henou an Æl  
 Eo dezàn commandet gant an Tad Eternel  
 En em apparissa gant e oll gonsortet  
 E traouyen Josaphat da glêvet o arret.

Clêvet e vizint partout betec er firmamant ;  
 Pebes counner euzic , pebes anrajamant  
 A grogo e Satan hac e gamaradet ,  
 Oboissa d'an Æl abers Salver ar bed.

Deut , eme Lucifer , tud soll ha milliguet ;  
 Deut dirac ar Barner , ma vezimp condaonet  
 Da lesqi ebars an tân epad an eternite ,  
 A zo decomp preparet evit hon infidelite.

Neuze commandammant a rai prest Lucifer  
 Ma vezo digacet prontamant ar c'hayer  
 Pelec'h e zeo scrifet qement pec'het hon eus grêt ,  
 Sonjet na lavarat aba m'omp var ar bed.

Pa vezo Satanas hac e oll gonsortet  
 Arru ebars ar plaç a vezo destinet ,  
 E tigoro e levr leun a bep vileni ,  
 Hac e tisquezo sclér e bec'het da bep hini.

Doue a hermetto an deiz-se da Lucifer  
 Da zisen e barti a enep ar pec'her,  
 Pehini a c'houlenno, e presanç an Drindet,  
 Venjanç eus ar pec'her ha demeus e bec'het.

Barner just, emezàn, Barner a virione,  
 Ha c'houi a ell lemel va zra diganeme?  
 Cetu va c'bayer leun demeus o sec'hejou,  
 O deveus coumetet a enep deoc'h, Autrou.

Cetu aze, Autrou, nombr bras a dud lubrie  
 O deveus grêt pec'hejou a so diabolic;  
 M'em boa, me va-unan, horrol ouz o sellet,  
 Venjanç a c'houlennàn, pa zê diu permetet.

P'en devo achuet Lucifer e ziscours,  
 Ne vouyo ar pec'her paour ouz piou caout recours;  
 Mar sell ouz ar Verc'hes, einedi e coler,  
 Prest da c'houlen venjanç a enep ar pec'her.

Ar Zent hac an Æles ne gredont laret guer,  
 O velet Jesus-Christ qen terrubl e coler,  
 Prest da losca an tân eus a lein an cêvou  
 Var benn ar bee'herien, balamour d'o vicou.

Neuze ar Barner just, hor Zalver Jesus-Christ,  
 A brononço un arrêt siouas a vezò trist  
 A enep ar pec'her hac an oll pec'herien,  
 O c'hondaono d'an tân e creis punç an ifern.

Tec'het pell diouzin, tud vil ha milliguet,  
 It da dâñ an ifern, a so deoc'h preparet;  
 It-hu da lesqi eno epad un eternite,  
 Ha qeit ha ma vezò tri Ferson en un Doue.

Lucifer gant ur voez horrubl ha detestabl  
 A lavaro dezo : deut-hu, tud miserabl;

Deut-hu da bunç an ifern, deut er flammou gries  
 Da lesqi ebars en tân ne finisso james.

Neuze ar re daonet a grio evellen :  
 Adieu, Salver ar bed, ret eo mont d'an ifern ;  
 Adieu, Guerc'hes Vari ; adieu deoc'h, Rouanes :  
 Ret eo mont d'an ifern da lesqi da james.

Me ro mallos d'an tad en deus va anjandret,  
 Ha mil mallos d'ar vam e deveus va ganet ,  
 Ha d'am amiequez ne devoa va mouquet ,  
 Pe va zaulet d'ar moc'h o devise va debret.

Mallos a roàn d'an heur ha mallos d'ar momet ,  
 Mallos d'an de biscoas ma voen-me badezet ;  
 Me garze beza taulet e cavarn ar serpent ,  
 Pa voan douguet d'an Ilis da receo badiziant.

Me ro d'ar c'hôvessour mil malediction  
 A les e benitantet ebars en abusion ,  
 Na zeu d'e refusi demeus an absolen ,  
 Qen na velje ennàn ur chenchamant a gress.

Ma carje va refus demeus an absolen ,  
 Ne vijen qet daonet da james evellen.  
 Pa vijen prest da bec'hi , e teuen da lavaret :  
 Hen-a-hen en deveus ar c'hasiou reservet.

Mallos a roàn d'an eol , d'al loar ha d'ar stered ,  
 P'am guelent o pec'hi n'o devoa va lonqet ;  
 Ha bremâ e c'houleñont venjanç oll em enep :  
 Cetu pebes poanniou a so dìn preparet.

P'en devo hor Zalver condaonet ar re-màn  
 Mont da bunç an ifern e compagnuez Satan ,  
 Gant ur visach contant , laouen ha gracius  
 E comzo eyellen ouz a re eürus :

Deut oll, va mignonet, deut oll d'ar Baradoes,  
 Da bossedi ur gloar ne finisso james,  
 Da gana da james ar c'hanticou nevez  
 A gan an oll Ælez gant peb seurt levez.

Neuze an Tad Eternel a lavaro deze :  
 Deut oll, va bugale, deut-hu oll ganeme ;  
 C'houi oc'h eus va servichel ha va Mab assambles ;  
 Evit ho recompanç, deut oll d'ar Baradoes.

Deut, eme ar Verc'hes, da guemeret ho partach,  
 Evel ma veritit, demeus ar guir heritach  
 A so deoc'h preparet a bep eternite  
 Evit ar recompanç eus ho fidelite.


Souden e vezint cunduet ebars er baradoes  
 Gant ar Verc'hes Vari, ar Zent hac an Æles,  
 Da gommanç ur vuez leun a bep joaüstet ,  
 E presanç an Drindet, ar Zent hac an Ælet.

Cetu amàn ur guentel a so verifiet,  
 Transportet a latin el langach brezonec ,  
 Evit avertissamant d'an oll gristenien  
 Da guittat o viçou hac ober pinigen.

Rac-se, va breudeur paour, en em gconvertisset ,  
 Distroit ouz Doue ha renoncit d'ar bed ,  
 Ha me a ell assuri deoc'h gant graç Doue  
 E viot eürus er fin eus ho pue.

Bremâ, va breuder christen, clêvit ho couvia  
 D'en em lacat en deiz-ze en tu a guevot guella :  
 Me a bed ar Verc'hes, ar Zent hac an Ælet  
 Ma vezo en tu deo e viot asezet.

FIN.



## CANTIC SPIRITUEL

### VAR AR MISSION,

*Elec'h ma zeus reflexionou var ar Pévar Fin diveza en egard an Eternite, evit ober deomp en em resolvi da lacat hor poan da c'hounit an eürusdet eternel er bed-hont, ha da renonç d'ar pec'het ha d'ar blijadurezou eus ar bed-mâ.*

Var ton Biron.

**S**ONJIT, den abuset, sonjit en eternite,  
C'houi peini so sujet d'ar pec'het a vanite ;  
Sonjit e rencot mervel ha quittât ar bed-mâ ,  
Pa zeui Doue d'ho qervel abars nemeur amâ.

Neuze gant calz a spont e rencot apparissa  
Da renta piz ho cont d'ar Barner rigourussa ;  
Ur setanç a recevot a vuez pe a varo ,  
Hac ar stat m'en em guevot da james a bado.

Nemet ur vech hepken ar barados na goller ;  
Eus an ifern biжен en em denna na eller :  
Hoguen barados collet , cetu tout êt da goll ,  
Ha barados gounezet , cetu gounezet oll.

Roet en deus Doue ar choas deoc'h en assuranc  
En eil pe en eguale da ober ho temeuranc ;  
En ifern pe er barados e rancot chom ato  
Da zêvi pe da repos , goude souffr ar maro.

E traou-se ma sonchac'h, e tilezac'h ar viçou ,  
Hac en en avissac'h da bratica ar vertuziou :

7

**E** veziant veac'h da dec'hel diouz peb occasion'  
**D**a goueza en ho pec'het hac en tentation.

**G**ouscoude oc'h qen dall, qen etourdi, qen obstinet;  
Ne zeus nemet traou-all oc'h occupi ho speret,  
**E**leac'h sonjal en affer eus ho silvidiguez,  
**H**a c'hui e quer bras danger da vont da goll iveau.

**S**aveteit hoc'h enc, an ifern abandonit,  
**H**a choasit prest an eê, liquit ho poan d'e c'honit  
Dre œuvrou a drugarez, pe a baciante,  
**H**a dre ar guir garantez en andret Doue bepret.

**C**ôvessaît a galon ho pec'hejou tremenet,  
**H**a goulennit pardon anezze gaut guir regret:  
**G**rit ar resolution gant courach da drec'hi  
**A**r goall inclination so ennoc'h da bec'hi.

**R**eglit guell ho puez hep conta pell da veva:  
Tremenit pep devez evel pa ve ho tiveza;  
Distroït hoc'h affection diouz an traou temporel,  
Oc'h ober reflexion var an traou eternel.

**A**r bed a dremeno, c'hui a dremeno ive;  
An ifern a chommo epad an eternite;  
An tourmant a so ennân james na finisso,  
**M**es plijadur ar bed-mà souden a berisso.

**S**iouas, peguer bras eo follentez ar c'hraouadur!  
**A**c'hoas devi e beo evit dister plijadur,  
Devi eternelamant assambles gant satan,  
Hep biqen soulajant en ur guele a dan.

**P**eguer far eo an den a renonç d'an esamant  
Eus ar vuez monden o choas an diesamant,  
Evit beza da james gant Doue o repos,  
**H**a gant ar zent assambles e joa ar barados.

Ar sort-ze n'o deus qet a velconi o vernel ;  
 Dre ur fizianç bras meurbet da gaout ar vuez eternel ;  
 Hac e laouenidiguez e vez neuse chenchent  
 Qement seurt tristidiguez o deveus dious ar bed !

C'hoas a ràn , va Zalver , em buez ar binigen ,  
 Souffr a rìn gant douçder pep seurt poan hivisiqen ;  
 Mes roït dìn an asistanç eus ho Speret-Santel  
 Da drec'hi va inconstanç , ma vezin deoc'h fidel.

Renonça ràn d'arc'hic d'ar bed ha d'an drouc speret ,  
 D'ar pec'hejou lubric ha d'an oll avaristet ,  
 Ma c'hellin en ho presanç , va Jesus , er maro  
 Apparissa gant fizianç , ha mont gueneoc'h d'am bro.

**AMEN.**




---

E Montroulez , e ti LÉDAN , e traon ru ar Vur.